



AR REDADEG

Kemennadenn – 25/10/2025

Diwar-vremañ e c'heller prenañ kilometroù !

Digor eo ar stal evit prenañ kilometroù Redadeg 2026. Loc'hañ a raio ar Redadeg eus kae Lannuon d'an 8 a viz Mae evit degouezhout war enez Naoned d'ar 16 a viz Mae. Etretant e vo bet redet 2226 km 'pad 8 devezh hag 8 nozvezh disehan. An dekvet Redadeg an hini eo, 10 darvoud ispisial a vo aozet a-hed an hentad.

Evit gallout dibab ar c'hilometr eo arabat chom da straniñ ! Evit ar re o deus c'hoant mont da redek 'kichen ar gêr pe en un lec'h arouezel evito, pe d'ur mare a glot gant o implij amzer e vo aesoc'h ober bremañ eget e miz Ebrel !

Gallout a rit prenañ en linenn : kit war lec'hienn ar Redadeg ha digorit stal.ar-redadeg... hag implijit ho kont m'ho peus unan pe grouit unan en un doare aes kenañ. Prest eo ar skipailh da reiñ sikour ma sav ur gudenn bennak evel just ! Bilhedoù pren a gaver ivez war ar pleg-dibleg (strewet e vo un tamm pep lec'h e Breizh gant ar skipailhoù lec'hel, er gouelioù, stalioù...).

N'eo ket cheñchet priz gwerz ar c'hilometroù : Tud war o anv : 100 € evit an dud dilabour ha studierien, 120 € evit ar re all, kevredigezhioù : 150 €, stalioù hag artizaned : 200 €, embregerezhioù adalek 300 € (diouzh o ment). Kumunioù : 250 € pe 350 €.

E giz boaz e yelo an hanter eus ar gounidoù da rouedad ar skolioù Diwan hag an hanter all da raktresoù, o fal diorren pe dreuzkas ar brezhoneg. Ar re-mañ a vo dibabet a-raok fin ar bloaz.

Petra nevez gant Redadeg 2026 ?

Kinnig a reomp deoc'h ar wech-mañ redek ha prederiañ war un dro. Dibabet hon eus tri ger da dem Redadeg 2026, tri ger a grog gant al lizherenn B, evel Breizh, evel Brezhoneg : Bevañ, Bodañ ha Bezañ.

C'hoant hon eus degas hol lod er preder war dalvoudegezh ar yezh evit pep hini ac'hanomp hag ivez evit hor bro

Ken niverus eo an dud desachet gant Breizh, gant dremmwel ar vro, gant spered hec'h annezidi, gant an tiez brav a gaver war vord an aodoù... Met petra dalv Bevañ Breizh ? Ul loen sokial penn-kil-ha-troad a zo eus pep hini ac'hanomp. En ur mod, plijet meurbet omp gant ar verb Bodañ. Ha n'ez eus ket gwelloc'h evit ur yezh evit bodañ an dud. Bezañ Breizhad, en em ginnig evel Breizhad ha brezhoneger a zo an diazez, diskouez kement-se dre h-e emzalc'h hag h-e oberennoù a zo gwelloc'h c'hoazh !*

Prederiañ a zo brav met arabat koulskoude disoñjal frazenn stur ar Redadeg « Brezhoneg ha Plijadur... hag al lugan brudet : Betek an trec'h !»

Darempred : www.ar-redadeg.bzh / postel : darempred@ar-redadeg.bzh / Pgz : 06 51 86 98 59

Ar Redadeg Ti Ar Vro – 6, Plasenn Gwirioù Mab-den 29270 KARAEZ - Siret : 518 503 628 00019 - APE : 9499Z



AR REDADEG

Communiqué – 25/10/2025

C'est quoi Ar Redadeg ?

Ar Redadeg, c'est du sport, c'est du plaisir, le tout pour une cause chère à la grande majorité des Bretons, la langue bretonne. C'est une course à pied en relais sans compétition, ouverte à tous, les familles, les jeunes ou les moins jeunes. C'est l'occasion pour enfants, parents et grands-parents de courir ensemble. On court aussi entre amis, entre collègues, entre voisins...

L'édition 2026 s'élancera de Lannion le 8 mai et arrivera à Nantes le 16 mai. Entre temps le relais aura été transmis 2225 fois de main à main à chaque kilomètre, durant 8 jours et 8 nuits sans interruption, sous le soleil ou sous la lune sous la pluie ou le ciel bleu. Dans ce relais, un message qui traversera les 5 départements bretons, ce message sera lu à l'arrivée par son ou ses auteurs ou autrices. Les milliers de participants feront vivre l'esprit et la transmission de la langue bretonne dans une joyeuse ambiance.

Cette édition sera la dixième et dix événements spéciaux jalonneront le parcours.

L'achat des kilomètres est désormais possible

On peut d'ores et déjà acheter et choisir son ou ses kilomètres en ligne en se rendant sur le site internet ar-redadeg.bzh et cliquer sur stal.ar-redadeg. Ceux qui ont déjà un compte pourront à nouveau l'utiliser, sinon il est très facile d'en créer un. Bien sûr l'équipe de la Redadeg pourra aider en cas de problème. On peut également utiliser le formulaire papier qui se trouve sur les dépliants, ceux-ci sont disponibles un peu partout en Bretagne, auprès des équipes locales et bientôt dans les fêtes, festoù-noz, commerces....

Le prix de vente des kilomètres est inchangé : particulier 100 € (demandeurs d'emploi et étudiants) ou 120 €, commerces et artisans : 200 €, associations : 150 €, entreprise : à partir de 300 € et communes 250 € ou 350 €.

Comme pour chaque édition la moitié des bénéfices sera reversée au réseau des écoles Diwan et l'autre moitié à des projets en lien avec le développement et la transmission de la langue bretonne. Ces projets seront choisis avant la fin de l'année 2025.

Cette année **l'événement a pour thème** un triskell de mots bretons commençant par la lettre B, comme Bretagne, comme langue bretonne : **Bevañ (vivre), Bodañ (rassembler-réunir), Bezañ (Etre)**. Une invitation à la réflexion autour de ces concepts pour ceux qui aiment la Bretagne et sa langue.